

niv. 23
Gouere 2003

ROUZIG



Vakansoù
Mat !!

C'hoariou, bannoù-treset
+ da c'hoari kartoù ROUZIG

**LOENED A FLEMM,
LOENED A ZANT !**



**Flemmañ
pe dantañ
a ra al loened
d'en em zifenn pe
d'en em voueta.**

Drein an avalaouer



An avalaouer en em zastum evit en em wareziñ. Goloet eo e gorf gant miliadoù a zrein. E genderv, an heureuchin-daredek, a zo hir-tre e zrein gantañ



Flemm ar grug

E beg e lost emañ flemm ar grug. Evit debriñ e pak e breizh gant e veudoù ha flemmañ anezhañ goude.




Korzenn ar skrilh-wez

Un doare korzenn begek a zo gant ar skrilhed-gwez. Ganti e pikont rusk ar gwez hag en em vouetaont gant ar sev, en ur sunañ.



Flemm ar wespenn.

D'en em zifenn e flemm houmañ : pa vez taget gant loened all, pe direnket en he labour.



Dent an naer

An naered a flemm gant daou zant begek-tre. Ampoezon a zo e beg : binim.

